

KIMIADOU EUR MARTOLOD A VREIZ CHANSON NEVEZ

Var don : *An drouc-hirnes* (le mal du pays) *Cetu ar flika a flok.*

Brétonet, me o ped, didostet da glevet
Eur c'hihiad truezus, eun adieu trist meurbet
A ra da guervrois quen monet d'ar brezel
Eur martolod iaouank maguet en Breiz-Izel:

An eiz-varnuguent a viz maë me oa en faction
Oar bont ma batimant bars er rad en Toulon,
O hortos partia vit mont d'an Itali
Oar ben tri de goude, e cleemp ambarqui.

Me gred a oa tremenet an heur a hanter noz
A ma c'hau'radet oa et da repos ;
Netra na drouble neuze ar silanç deuz an noz
Met ar mor e vurmuri gant eur moës rust a gros.

Ma daou zorn a or c'harpet oar ma c'harabinen
dindan ma zreid ar mor bras ac an Env us d'am fen ;
Heusi ran va mignonet pa deuan da gomprén
Na ve tre 'n den ac ar maro nemet treus eur planquen.

Pa n'em velis ma unan oar bont ma batimant
Ep test deuz ma glac'har nemet ar firmamant
Me gommences hirvoudi gant glaher ac anquen
Pa deuas da jong din a barous Trabrien.

Ma daoulagat oa troet a zu ar vilajen
Lec'h a ma da guenta guelet ar sclerijen ;
A pa deuis da jonjal em c'herent ac em bro
Gant an dour deus ar mor n'em vesque ma daëro.

Aboue an devez fatal a meus renquet quittat
A dont da guimiadi deus ma mam a ma zad
Bep noz pa ven coussquet em huvre o goëlan
Ac o jonjal 'n ho glac'har noz a de a ouëlan.

O devez leun a glac'har, a sizesper c'ncéro,
O devez deplorabl a carguet a canvio
O quimiad anquenius a glac'harus meurbet
Me mo jonj ac'hanout queit a vin oar ar bed.

Gant ma c'herent er guer e ma nehamant
Hi ra ma oll chagrin a ma brassa tourmant ;
Penoz annónci dé c'han breman d'ar brezel
Aoun meus d'ho lacat gant an nec'h d'a verval.

Pa glevont queument-se a devout calonad
Goassoc'h vit an devez a renquis ho c'huitad.
Ac hi devo couraj a oalc'h vit gallout supporti
Ep ma ranno o c'halon gant eur c'helo quen cri.



Da gonsoli ma herent quent vit quitat ar Franç,
A da gas betec eno comsou a esperanç.

Mes allas ! me n'allan quet, veldout, treuzi an aer,
Me a renq chom aman evel eur prisonnier,
Evel a oa goechal an Israëlitet,
Pel amzer o hortos an douar prometet.

Marteze teus, eonic, scuiset da zivesquel,
O nijel dreus d'ar mor, o tont dreus eur vro bel ;
Pleg eta da esquel a so bet pel digor,
A repos eur momad en quichen map Arvor.

Disquen eta, eonic, eur momet en c'hichen,
Ma scrivin eur lizer da gass da Drabrien ;
A pa meus quet veldout ar bonheur dont d'ar guer,
Te vo da viana vidon eur messager.

Querquent evel ma yi digaoet en Breiz-Izel,
Te vo, eonic bian, ma messager fidel ;
Te reï ma gourhemen er guer pa errui,
Hag a laro d'am zud a c'han d'an Itali.

Grit ma gourec'hemo d'an tal neuz ma maguet,
Mæs allas ! da mam baour, da hones na rit quet,
Rag bœ zon partiet demeus a Vreiz-Izel ;
Eouet da jouissa deus ar gloar eternel.

Lar adieu d'am breudeur a d'am c'hoarezet,
Goude d'ar belec coz a neveus ma badeet,
Nâ ancoue hini bet demeus ma mignonet.
A lar de a sonjan enno en peb momet.

Lar de, eonic bian, pedi vidon bep nos
An Itron Varia, patronez ma faros,
Ma teui d'am preservi en creis an dangerio,
A ma raï din ar c'hras da retorn c'hois d'am bro.

Mar a teufe dit c'hoas, pa vi en Breiz-Izel.
Racontri eun devez ma mignones fidel,
Lar deï a fo guelet Yvonic, e mignon.
Hober gard, eun nosves, oar e lest, en Toulon. .

Assur dezi er fad dre broposiou touchant,
Meus bepred eviti eur garante ardant ;
Lar deï a ha brema ma c'horf d'an Itali,
Mæs ma c'halon a vo da virviquen ganti.

Pa zeï an nevez amzer, te iel alies
Da gana, da fredoni, da guichen he frenes ;
Perac ne allan me nijel eur vech guenoc'h
A mont de zaludi beteg e zi vel doc'h ;

Houi sperejo evurus, o sœnt a sæntezet,
Itron-Varia-Drue, ma guir vam biniguet,
Reït de ners a couraj en ho affliction,
Reït de ho assistanç, confortet ho c'halon.

Pelec'h eo et breman querent à mignonet,
An amzer-ze quen douç hac agreabl meurbet
Pelec'h eo et breman ann amzer eürus-se
A oan en Trabrien e no toez bende.

Niget eo pel d'ouzin an amzer quen eürus
A oan sambles guenac'h, camaradet joaüs,
Tremenet e vidon, marteze vit james,
Ar bonheur ac ar joa m'mem tanvet assambles.

Pa zei ann nevez amzer da gagan adare
Ar guez a vleuio caër ac a zelio neve,
Pa zeuf e voar e c'his ar guenidel er vro
Na nimp muin assambles bep sul d'ar pardonnou.

Pa oan en ho touez oan joaüs a laouën,
Mæs breman c'hon mantrret, ziouas ! gant ann anquen,
A ma oll plijadur zo bout neur plaç disro
O sonjal gant glac'här em c'herent ac em bro.

Houi a velse breman Yvonic ho mignon !
O pourmen e unan oar ar rad a Toulon,
O pourmen e unan alies tal an nod
A daërc he zaoulagat a red var e ziouchod.

Me ve c'hoas alies azeet oar eur roc'hel,
Ma daoulaguat troet e var zu ar Breiz-Izel,
Mantrret gant ar glac'här, a beuet em daërc,
O sonjal em c'herent zo er gner en oanvo.

O douar a Vreiz-Izel, o ma bro biniguët,
Pegouls r zono an heur ma c'hin c'hoas d'ho kuelet
Pegouls a erruo ar momet ac ann de
A zeuio da laquat fin d'am c'haptivite ?

O devez leun a zouster, devez a eürustet !
Me zo sonjal ennout bep heur a bep momet ;
Doue trugarezus, hastet ar momet-se
Ma c'hin c'hoas da velet ma bro a ma c'hontre.

Tre ma oant o teplori oar bont ma batimant,
Ar loar a darzas souden ebars er firmamant ;
Neuze me a velas us d'ami fen o nijel
Eur guenidel bian evar zu Breiz-Izel.

O ! prest din-me, eonic, prest din da zivesquel
Ma nigin en ez plaç da bete Breiz-Izel,

Mæs gra ebars em flaç, a lar deñ, dre da son,
Derc'nel jonch da viquen demeus e guir mignon,
Pec'hini zo, alias ! pell deus a Vreiz-Izel,
En eur lest, oar mor, foetet gant an avel.

Pa vin en Itali, en creïs ar c'hombajo,
Creïs an tan, ar mitraill a cros ar c'hanonio,
Neuze eo a teuio ar muian da jonch din
Deus an amzer eurus so nijet pell d'ouzin.

* Mar teu din da vont tiet gant eur boulet traitour,
Hag achui ma deio en eur vro estrajour,
Neur gouean d'an douar c'hoas, quen evit mervel,
Ma dooulagad a droo evar zu Breiz-Izel ;

Ma daoulagad a droo evar zu Breiz-Izel,
Da laret d'am c'herent e adieu eternel,
Da laret d'am mignonet an adieu diveza,
A quen ar bonheur d'en em velet bars ar joa.

Mar a velfet eun de, neur len ar gazeto,
Ma hano, siouas din, oar bultin ar maro,
Querent ha mignonet, c'hui laro gant glac'har :
Gras dean digant Doue da repos bars er gloar.

Quent evit finissa goulomp digant Doue,
Vit ar martolod quez, bep sort prosperite ;
Pedomp a vir galon Roue an armeo
D'en preservi en creïs quement a dangerio.

Oifromp c'hoas on venio da Stereden ar mor
Vit an oll soudardei deus on bro gær Arvor ;
Goulomp gant confianç, pedomp hi gant ferveur
Da bellat dioute peb goal chanç a goal heur,

Rentomp meulediguez da arme gær ar Franc,
D'hon princ quen generus a leun deus a vaillanç
Pere guita o bro vit mont da gombati,
Evit independanç oll bopl an Itali.

Canomp breman n'eur vouez, canomp tout a sambles
Ra vezint enoret a meulet da james ;
Canomp ta, Bretonet, deus fons on c'halono,
Gloar ac enor d'ar franc, ive d'hon armeo !

Neb a neus comboset ar son man pen da ben
So ganet a maguet en paros Trabrien,
A neus he c'homposet oar an ton di c'hana,
Canit-hi ta, Bretonet, vit n'em divertissa.

(Propriété de l'Éditeur.)